

LES ACCÈS À LA GARE ÉVOLUENT

La transformation des voies d'accès au pôle d'échanges multimodal (PEM) accompagne la construction de celui-ci. Une première phase s'est achevée, une deuxième se poursuit, une troisième s'annonce.


La rénovation des réseaux souterrains, première étape de l'opération vient de se terminer. La circulation se fait donc à nouveau à double sens, depuis la mi-mars, entre le rond-point Brossolette et le n°40 de l'avenue de la Libération. Les rues de Concarneau et Dom Michel Le Nobletz ont été rouvertes à la circulation – la première à double sens, la seconde à sens unique – et le stationnement gratuit a été rétabli. Leur réaménagement devrait se poursuivre mi-2023 avec la création de pistes cyclables, de trottoirs plus accessibles et la mise en place de containers à déchets enterrés.

Deuxième étape, le réaménagement de l'avenue de la Libération se poursuit. Les travaux s'organisent en deux tranches successives afin de préserver constamment une voie de circulation à sens unique. Concrètement, une moitié de chaussée et le trottoir attenant sont concernés à chaque fois. En ce moment, c'est le cas côté voies ferrées, puis, mi-juin, le chantier basculera côté des numéros pairs de l'avenue jusqu'à la fin de l'été. Le stationnement pourra alors être rétabli. Le parking Effia longue durée ouvrira, lui, à la rentrée.

Enfin, le réaménagement d'un premier tronçon de l'avenue de la Gare devrait démarrer début juin pour s'achever trois mois plus tard. Ce secteur devant être fermé à la circulation automobile, l'accès à la gare depuis le centre-ville suivra un itinéraire alternatif (voir plan ci-dessous). En revanche, l'accès des piétons aux commerces ainsi que l'accès livraison pour les commerçants sont préservés.



Réaménagement de l'avenue de la Libération côté voies ferrées : pose de nouvelles bordures de trottoirs



PLUS D'INFOS SUR LA PAGE FACEBOOK GARE PARC ET SUR LE SITE QUIMPER-BRETAGNE-OCCIDENTALE.BZH !
 POUR TOUTE QUESTION : GAREPARC@QUIMPER.BZH

AN HENTOÙ DA VONT D'AR GAR ZO O CHEÑCH

Emeur o treuzfeurmiñ an hentoù da vont d'ar pol eskemm liesvod (PEL) hag o sevel hennezh war un dro. Ul lodenn gentañ zo echuet, un eil zo kendalc'het, un deirvet zo da zont.


Nevesaat ar rouedadoù danzouar, al lodenn gentañ eus an oberiadenn, emeur o paouez echuiñ. Gallout a ra ar c'hirri mont adarre gant an daou du, abaoe kreiz miz Meurzh, etre kroashent-tro Brossolette hag an niv.40 e bali an Dieubidigezh. Ar straedoù Konk-Kerne ha Mikael an Noblez zo bet addigoret d'an tremenezh — an hini gentañ en daou du, eben en un tu hepken — ha parkañ digoust a c'haller adarre. E-kreiz 2023 e tlefed kenderc'hel da adkempenn an traoù evit krouiñ roudennoù divrodegoù, riblennoù-straed aesoc'h da vont warno hag evit staliañ kontenerioù dilerc'hioù douaret.

Da eil, emeur o kenderc'hel da adkempenn bali an Dieubidigezh. Emeur oc'h aozañ al labourioù e daou brantad lerc'h-ouzh-lerc'h abalamour da virout dalc'hmat ur forzh tremen untu. Evit gwir, un hanterenn eus ar chaoser hag ar riblenn-straed sko outi a vo e kont bep taol. Er mare-mañ e reer kement-se e tu an hentoù-houarn, ha goude-se, e-kreiz miz Mezheven, e vo digoret ar chanter en tu all d'ar vali betek dibenn an hañv. Neuze e c'hallor parkañ kirri enni en-dro. Ar parklec'h hiramzer Effia a vo addigoret en distro-skol.

E deroù miz Mezheven e tlefed boulc'hañ al labourioù da adterkañ ur pennad kentañ eus bali ar Gar, a-benn ar fin, hag echuiñ anezho tri miz diwezhatoc'h. Dre ma vo berzet tremenezh ar c'hirri en tolead-se e vo kinniget un doare all da vont d'ar gar adalek kreiz-kêr (gwelet an tres amañ dindan). A-hend-all e c'hallo an dud war-droad derc'hel da vont betek ar stalioù hag evit ar genwerzherien e vo kendalc'het d'ober degasadennoù.



Adkempenn bali an Dieubidigezh e tu an hentoù-houarn : Lakaat bevennoù nevez a-hed ar riblennoù-straed



**EVIT GOUZOUT HIROC'H : PAJENN FACEBOOK AR GAR LIORZH HAG AL LEC'HIENN QUIMPER-BRETAGNE-OCCEIDENTALE.BZH !
EVIT FORZH PESEURT GOULENN : GAREPARC@QUIMPER.BZH**